


Son ar Intanv.

Chanson
Recueillie par le sieur Abbé Le Gall Papeyck



In - tan - vier ar c'hau. tou di-dos-tait da glevet in



tan - vier ar c'hau tou di-dos-tait da glevet in



ou - hoz pa da ben war ar pa - per skrivet eun ou - hoz pa da



ben war ar pa - per skri - vet

Intanvier ar c'hanton didosleit da glevet

(bis)

Eur vuhez pen-da-ben war ar paper

[skrivet (bis)]

Eur c'hreg war he gwele e-harzig ar

[marc]

A c'halvas he fried gand he bugaligou.

Avanset oc'h en oad ho pugale zo bras

Ma c'houllfen zimelfoc'h raffec'h d'in

[jagrin bras.]

An oac'h deus e c'hlevet a douchas he

[galon]

— « Me na zimizein ket ma dousik

[Marivon ».

Na oa ket eiz te c'hoaz an interamant

[gret]

Ma gomanse an intanv fitchal deus ar

[merched]

En em ficha a ra freska ra he zillat

Partout e lec'h ma ia d'ar foar ha d'ar

[marc'hat.]

En amzer he wreg all na gribe ket he

[benn]

Breme raktal ma zav a ia d'en gempen.

En amzer he wreg all na ie d'ofern

[a-bed]

Breme bep sul bep gouel a ia d'an

[ofern-bred.]

E amzer he wreg all na ie da di a-bed

Pe ma oe fwell't o vont a oe dre he

[zaou bleg]

Breme a zao he benn'o ia huel owalc'h

Guell welie eun neiz pik evit eun

[houarn marc'h.]

Recueilli dans le Cap Sizun.